

1)

JAN 14

Son. n. 34. Levenn I. 2. Noret Eusa

Addekrivet heplken
evit gmedet hufjellet
e vezo kavet an ton.

¹
D'an dervez kenta a chouere.
Dei Tra la la, la dira la.
D'an dervez kenta a chouere,
Dervez pardon ar Foret !

²
Mont a ra Yvon Saurans
Da werza e gountell.

³
Evit brema per hag avalou
Da merc'hed e ganton.

⁴
ar merc'hed a lavare
en eur heja o fenn.

⁵
" Ni n'hon eus ket offer
ni zo ar hant n'hor godell.

⁶
Mont a ra Yvon Saurans
da brema avalou reuz,

⁷
Evid ar wech-man, emezan,
n'em bo ket a refus.

⁸
ar merc'hed a lavare
en eur c'hoarziñ a bouez fenn

⁹
Ni n'hon eus ket offer, Yvon,
ni zo leun hor godell.

¹⁰
Mont a ra Yvon Saurans.
P'ar gêr da gacout e vamm.

11

allas! en dro-mañ emezan
e rankin chom hep tamm.

12

Tavit, tavit, Yuon Saurand,
Tavit na ouelit ket.

13

Dont a ray Mari an Arrou,
eur wech c'hoaz d'ho kwelet

14

Hounnez pa vez en he brava,
He devez seiz godell.

15

'Ben m'ho po karget ar re-re.
rô aet arc'hant ar gountell.

16

Ar zon-ma zo bet komporet,
met ne vo ket kaset

17

Ken a vo disul kenta
pa vezimp o hoania!

18

Pa vezimp holl asamblez
ouz taol gand an dud nevez

19

o libri hag oc'h eva bannec'h
asamblez
Da yec'hed an dud nevez!